

JEZUZ O TOUGEN E GROAZ

Pec'her, pec'her, digor da zaoulagad,
Ha sell aman, sell piz ouz ar pez koat,
A dle war-n-an, hag 'vid-oud, da Zalver
Gouzant hirie ar maro 'tre daou laer.

Jezuz barnet d'ar maro

Rag douget ê 'r varnedigez skrijuz :
Stag ouz ar groaz mervel a rank Jezuz,
Anez, an Nenv ouz-imp 'chomo zerret ;
Kalonou dir, ne vefet-hu frailhet ?

Jezuz sammet gand e groaz

Sethu Jezuz o kregi en e groaz,
Ponner meurbed, gant hon fec'hejou braz ;
Krena a ra e izili d'ean,
E-lec'h rei dorn, holl e skoont gant-an !

— « Bourevien kriz, 'skoet ket gant Jezuz !
Gwelet 'pe stad 'man e gorf truezuz ;
A c'houlou ho peuz e c'holoet,
Hag e benn sakr, a spern lemm, kurunet. »

« Sellet, sellet ; nan ê mui nemed gwad :
Penôz, neuze, e tougfe 'seurt pez koat ?
Ho pezet aon ne darsfe ar c'hurun
A-uz d'ho penn, d'ober ouz-oc'h bruzun ! »

— « Tad euz an Nê, Doue holl-c'halloudek,
Ho pet true euz ho Mab ezommek !
E vourevien, krisoc'h eged tigrad,
War e gorf sakr, a sko, a sko kalet ! »

— « Elez an Nenv, diskennet d'an douar
Evit diskouez da Jezuz ho klac'har !
An den divad, kiriek euz e boaniou,
E-lec'h daelou, a ro d'Ezan taoliou ! »

Jezuz o kouean dindan ar bec'h

Jezuz a gouez, gwasket dindan e vec'h ;
Hanter-varo e welan e ziouvrec'h,
E zivesker (1) a deu da fazian
Hag e galon, siouaz ! a vank d'Ezan.

Jezuz oc'h en em gavout gand e vamm

— « Mari, Mari, c'houi, e vamm vinniget,
Ma oc'h euz c'hoant, eur wech c'hoaz, d'e
Hastet buhan ! 'Man o vont da vervel, [welet,
Dindan e groaz, 'kreiz eun anken marvel. »

« Mamm a c'hlac'har, tener ê ho kalon ;
Ouz e welet, e ranno, 'm euz aon !
Mar gellet, ia ! en hoc'h anken garo,
Komzet out-An, ha c'houi e gennerzo. »

— « Ma Mab, ma Mab, ha c'houi a zo aze ?
Piou 'ta en deuz ho laket er stad-ze ?
Siouaz ! ma Mab, c'houi santel ha dinam !
Ouz ho kwelet ma c'halon a ziframm. »

« Lavaret mad en devoa Simeon
E tliec'h-hu glac'hari ma c'halon,
Pebez anken ! Ma Mab, da vihana,
Gret d'in mervel e-harz ho treid ama. »



Simon a Sirena a ro dorn da Jezuz da
zougen e groaz

— « Pelec'h eman Simon a Sirena
'Vit ma tevio d'ho skoaiian, d'ho harpa ?
Simon, Simon digaset ho tiskoaz,
Evit dougen eur pennik euz ar groaz. »

« Eun dismeganz kavfet, me oar ervad,
Ha, koulskoude, 'vid-oc'h pebez eurvad !
Rag, goude-ze, eun de ho po enor,
Er Baradoz pa ho tigemeror. »

(1) E ziouhar.

5

Santez Veronika o sec'ha e zremm d'hon Zalver

— « Ha nan euz den a rofe eul lien
Evid sec'ha d'Hon Zalver mad e benn ?
Veronika, nemed-oc'h a rafe,
Ne gavfed den da ober kement-se. »

« Tostaït 'ta, maouez trugarezuz !
Oc'h paeet mad gand an Holl-c'hallouduz :
War ho lien da virviken merket,
E lezo skeud e benn sakr kurunet. »

Jezuz a gone evid an eil gwech

Seul ma vale, ha seul skwisoc'h ez a,
E c'houlou n'ehanont da wada ;
An hent, e dreid, e gorf hag e zilhad,
A zo rusiet, pep kammed, gant e wad.

— « Tremenidi, o vale dre 'n henchou,
Ha c'houi hoc'h euz gwelet c'hoaz seurt poa-
Ha n'ê ket gwir, biskoaz, var an douar, [niou?
Ne welaz den kement all a c'hlac'har ? »

Jezuz a goue d'an douar adarre ;
Ken toc'hor ê, ma ne c'hell mui bale ;
Mankout a ra e galon d'hon Zalver :
Kouean a rank dindan e groaz ponner.

— « Bugale kriz, didrue, deud ama,
Deud da welet ho Tad penôz ema !
Hag 've ken yen ho kalon hag ar men,
E ranno, sur, o welet e anken. »

« Klevet a ran eskern Jezuz 'strakal
Dindan taoliou e vourevien gwall-fall ;
'Lec'h e harpa da zevel en e za,
E sailhont holl gant konnar war-n-eza. »

« Ha me, pec'her, n'hellan lavaret ger,
Rak me 'zo kaoz, ia ! me eo ar muntrer !
Aotrou Doue, rei d'in keuzidigez :
Na zellezan (1) nep frealzidigez. »

Jezuz o frealzi merc'hed Jeruzalem

Gand ar Skribed, ar Farisianed,
Gand al laeron ê hon Zalver kelc'het ;
En hent, 'rao-z-an, e son an trompilhon,
Evit emban en deuz graet torfejou.

E chacha 'reer gant kerdan a bep tu,
Ne glever ken, dre-holl, nemed an hu
War hon Zalver, e-giz war eur c'hi klanv :
A-nerz o c'horf, e skoont holl war-n-An !

— « E pe lec'h 'moc'h, gwraze Jeruzalem ?
Me 'oar ervad n'hen klevet ket o klemm :
Ha, koulskoude, e anken 'zo ken braz,
Ma tlefac'h holl mervel gant spont ha kaz. »

« Gant kaz ha keun, en goueled ho kalon,
Da veza kaoz euz eun hevelep kaon ;
Ha ma ouelet, gouelet d'ho pec'hejou,
Kiriek ez int eveuz e holl boaniou. »

— « Deud, Madalen, deuet gant ho louzou,
Da zistana d'Ezan e c'houlou ;
Sethu aman ho Mestr, prest da vervel :
Gant ho kuchou, zec'het e dreid santel ! »

Jezuz staget ouz ar groaz

Erruet ê e-kichen ar mene,
Gant kalz a boan, evit koll e vue :
Aman en do, adarre, trevel braz,
Evit pignat ouz krec'h, gant samm e groaz.

— « Kenavo 'ta, Jezuz, Zalver ar bed,
Red ê mervel, pe ni holl 'vo kollet !
Tosta, boureo, gand an tachou houarn,
Sethu Jezuz oc'h asten e zaouarn ! »

« Me a garfe, ma Jezuz, gand daelou,
Gwalc'hi ho kroaz hag hoc'h holl gouliou !
Gand melkoni, bruzunet ma c'halon,
Evit ma vin suroc'h euz ho pardon. »

« Mil bennoz d'ec'h, ma Jezuz, a bedan,
Anoudek braz e vin d'ec'h a-vreman !
Panefe-c'houi, me a vije daonet :
Ha spî am euz pelloc'h ne vezin ket ! »

« Me am bezo, betek fin ma bue,
Koun mad ato euz ma zilvidigez ;
Sonjal a rin gand ar brasa aket,
Er peuz am euz, hirie an de, gwelet. »

« Me a c'houlou, digan-ec'n, ma Zalver,
Gras da dremen ar rest euz ma amzer,
D'ho servicha leal gant karante,
'Vit kaout, goude, Baradoz d'am ine ! »

IMPRIMATUR :

Brioci, de 29^a martii 1899.

M. LE PROVOST, v. g. a.

(1) « Je mérite » en gallek.